

Eun Devez Eured

Ton : *La belle Baigneuse.*

DISKAN.

*Ma mestrezik
Em c'halonik,
Permetted dime eun tamik
Lavaret deoc'h ma c'harante,
A bado hed va bue !*

I

Kenver an deis se mintin mad,
Boan ma digor an daoulagad,
E ver sonj deus ar blijadur,
Fors peguement vo drazur !

II

Aben eur penad goudeze,
An dud neve ier da vuelet.
Traou da zibri, da eva vo
Vit peb unan kement garo.

III

Kortèj dont dar voch a vo gret
Ag eno pa ver digouezet
An dud neve vo eureujet
Gant mair, person vent staguet.

IV

Meren goudeze a vo prest
Nemet gret ve rok eun tam fest
Frico vo roët deus ar guella
Evit an oll memes tra.

V

Warlech ma tro ar yaouankis
Vit dansal evel ma ar guis,
Re gos evo chopinadou
Pe c'hoario ar c'hartou.

VI

E fin an de a vezo koan.
Peb unan no laket e boan
Da zansal pe da vouse'hoarzin,
Da c'hoari pe da eva gwin.

VII

An tol bras zo hont da gomans
Vit re yaouank bars ar zal dans.
Eno peb unan a choajo
An ne guella a blijo.

VIII

Plijadur vras a vo neuze.
Promessaou vo gret martreze
Vit ober do zro kement all
Ma mestrezik demp raktal.

IX

Eirusted devesomp eb mar
Keit ma vezimp var an douar,
A mar e nefemp bugale
Pebes joa vidomp neuze !

François BENOIT.